

Thierry Aofred hag ar c'hoursoù war-droad

Dimeurzh da noz oa en em gavet un daou-ugent den bennaket e sal an amzer libr evit selaou ar gaozeadenn vrezhonek aozet gant ar gevredigezh Hent Don. Thierry Aofred oa an hini pedet. Ur paotr deus Bear eo, hag anavezet-kaer eo da vên eo ur c'hourser war-droad kapabl. En tu-hont d ase eo prezidant deus an AS Bear athletism abaoe kazi 20 vloaz. E menaj e dud, e Kerlae e Bodlezan, oa ganet. Eno 'neva kresket, ha desket brezhoneg en ur glevet e dud o kaozeal. Dimeurzh 'neus diskwelet d'ar saliad tud pegement a blijadur 'nez o komz yezh ar vro. Sot eo ar paotr gant ar redadegoù war-droad. Neuze 'neus kontet bern traoù war ar redadegoù 'neva goneet, e veajoù er broioù all, an darempredoù gant ar rederien all, an traoù kaer pe ar c'hozh traoù 'neus bet goneet... soñj mat 'neus deus ar gwai kozh 'neva goneet e Pontrev, ha deus ar parti oa bet goude lec'h oa bet esaet poazhañ al loen e-pad peder eur ! Da diwezhañ 'neus gallet an dud er sal goulenn traoù gantañ, diwar-benn ar redadeg war-droad, a-raok evañ ur chopinad asambles.